

# AR GWENNEK

---

AIR : Livaden Ger-Iz. MUSIQUE : IEZ TREGER.

I

1

Gwennegik ker, lavar d'in-me :  
Piou out; a belec'h e teuz-te ?  
Pelec'h ez ? Lar d'in da doare.

2

Me a deu dimeuz ann armel,  
Armel Itron pe dimezel,  
Ha deuz gwestik wenn ar bugel.

3

Me deu euz ialc'h ar bugel mad,  
Pe ve deuz kear, pe ve koueriad,  
Den a vrezel pe merdead .

4

Me deu euz ialc'h ann den a boan :  
« Oh ! pa vin maro, emez'han,  
Me 'mo ar baradoz 'vit'han. »

5

'Lec'h prenan ganin eur zeïen,  
Pe 'vid he zal eur gurunen,  
Ar plac'h am ro 'vel aluzen.

6

Me 'deu euz godel ar paour kez,  
Ann emzivad, ann intanvez  
Leun a feiz hag a garantez.

7

Ma zalvoudegez zo bihan ;  
Diouin a rer neubeut a van :  
E gwirione, kalz e talan.

II

8

Me 'ia da brena inéou ;  
Me 'had ar feiz enn holl broiou ;  
Me a dizec'h meur a daëlou.

9

Dre-z-oun bugale dilezet  
A ve bevet, a ve disket,  
Ha hervez Doue 've zavet.

10

Me a ro louzou d'ar c'hlavour,  
Eur gwiskamant mad d'ann den paour ;  
D'ann holl dud enn ezom, zikour.

III

11

Gwennegik, kerz, red d'ann tiez ;  
Dre-holl kas d'ar c'horfo buez,  
Ha d'ar sperejo levenez.

12

En tu-all d'ar mor glaz ive  
Kerz : disk d'ann holl karet Doue ;  
D'id hon bennoz... ha Trugare.

BARZ MÉNEZ-BRÉ.

---